


AN ANGELUS

1. Ni ho salud gant karantez,
Rouanez ar Zent hag an Elez,
C'houi a zo benniget O pia,
Hag a c'hrasou karget Ave Maria !
2. Ra vezo benniget Jezuz,
ar frouez eus ho korf evurus,
Kanomp gant an Elez O pia,
E veuleudi bemdez Ave Maria !
3. Ni ho ped Mari, gwerc'hez c'hlan,
Pa vezimp war hon tremenvan,
Da c'houlenn ouz Jezuz O pia,
D'eomp eur maro eürus Ave Maria



SPERED SANTEL

1. Spered Santel Spered a sklerijenn,
Plijet ganeoc'h ennomp breman diskenn,
A sklerijenn karget hor sperejou,
A garantez tommit hor c'halonou.
2. An Ebestei en eur zal unanet,
Gant nerz ho kras ho peus bet entanet,
Ra vo 'vidomp ken bras ho madelez,
Hepdoc'h ne d'omp, nemet sempladurez.
3. Gwerc'hez Vari, esperans ar pec'her,
Pedit Jezuz ho Mab hag hor Zalver,
Grit d'hor spered kompren komzou Doue,
Ha d'hor c'halon o mirout goudeze.

ADOROMP HOLL

1. Adoromp holl e Sakramant an aoter,
Doue kuzet Jezuz hor mestr, hor Zalver,
Sperejou evurus, Elez ar Baradoz,
Gant karantez a dan meulit hen deiz ha noz.
2. Gwir Vab Doue en em c'hraet den d'hor prena,
En osti sakr oc'h kuzet vit hor maga,
Plijet ganeoc'h skuilha eus ho tron an aoter,
Warnomp daoulinet aman ho pennoz va Zalver
3. Enor ha gloar, ha karantez da Zoue,
D'an Tad, d'ar mab, d'ar Spered Santel ive,
Ra vezo e pep lec'h an holl grouadurien
Aketus d'e veui hirio ha da viken.

O ELEZ AR BARADOZ

Diskan :

Mari gwir Vamm da Zoue, Mari va Mamm dener,
Va zikourit da reseo ho Mab ha va Zalver,
Me ne d'oun, siouaz, netra netra nemet pec'hed,
Met ennoc'h am eus fizians o va Mambenniget.

ME HO SALUD

1. Me ho salud korf va Zalver,
'Zo diskennet war an aoter,
Ennoc'h eo bet chenchet ar bara,
C'houi'zeuy em c'halon d'am maga.
2. M'ho salud ive gwad divin,
'Zo er c'halir elec'h ar gwin,
c'houi evidomp a zo bet skuilhet,
Deut d'hor gwalc'hi a bep pec'hed

DA FEIZ HON TADOU KOZ

Diskan :

Da feiz hon tadou koz,
Ni potred Breiz. Izel,
Ni zalc'ho mat ato,
'Vit feiz hon tadou koz,
Hag endro d'he baniel,
Ni holl en em stardo,
Feiz karet hon tadou,
Morse ni ho nac'ho,
Kentoc'h ni a varvo (ter).

1. D'arc'hrouadur bihan, e kichenig e gavel,
E lakit eur vamm vat en deiz evel en noz,
Er boan hag en anken hi a daol buan eur zell,
War groaz zantel Jezuz he sonj er baradoz.
2. D'ar potr, d'ar plac'h yaouank, c'houi'ziskonez
[hent ar furnez,
C'houi'lavar : « It gantan hep krena dirak den ;
Bezit, tud yaouank Breiz, bezit epad ho puhez
Ato gwir gristenien, treitourien birviken ! »
3. D'an den koz gwenn e benn, e korn an tan azezet,
O skuilh daelou a geuz war e amzer genta,
War-lerc'h kalz a boaniou, c'houi'lavar, Salver
[karet,
Er baradoz e vo eürusted evitan.
4. D'an den diwar ar maez, kenkoulz ha d'an den a
[vor,
C'houi a ro nerz-kalon da stourm er boan ato ;
Gouzout a reont en nenv e kavint holl dor zigor :
Ar vuhez 'vo bet tenn : d'an drubuilh kenavo !

NI HO SALUD, O LEUN A C'HRAS

- 1 Ni ho salud o leun a c'hras,
Ar zantela 'zo bet biskoaz, Mari,
Ar zantela 'zo bet biskoaz,
2. Ganeoc'h bepred eman Doue,
C'houi'zo d'ezan korf hag ene,
Mari...
- 3 Benniget dreist an holl gwragez,
C'houi'zo Mamm hag atao Gwerc'hez,
Mari...
4. Benniget eo ive Jezuz,
Frouez Santel ho korf evurus
Mari...
5. Santez Mari, Mamm da Zoue,
Klevit pedenn ho pugale,
Mari...
6. Pedit evidomp, pec'herien,
Breman ha war eur hon tremen,
Mari...
7. Ma 'z aimp ganeoc'h d ar Baradoz
Da veuli Doue deiz ha noz,
Mari,
Da veuli Doue deiz ha noz !

PATRONEZ DOUS AR FOLGOAD

Diskan :

Patronez dous ar Folgoad,
Hor Mamm hag hon Itron,
An dour en hon daoulagad,
Ni ho ped a galon,
Harpit an Iliz santel,
Avel diroll a ra,
Tenn hag hir eo ar brezel,
Ar peoc'h o Maria !

ITRON VARIA RUMENGOL

Diskan :

Itron varia Rumengol,
Gwerc'hez galloudus remed holl,
Roit d'eomp hirio, en han' Doue,
Yec'hed ar c'horf hag an ene.

NI HO SALUD ROUANEZ AN ELEZ

1. Niho salud Rouanez an elez,
C'houi zo hor Mamm ar Vamm a drugarez
Hon holl douster buhez hag esperans,
Ni ho salud gant ar vrasa doujans,
- 2 D'eoc'h-hu, Gwerc'hez, e kasomp hor pedenn,
Ni divroet ha, siouaz ! pec'herien ;
Ouzoc'h, Gwerc'hez, e kriomp er bed-man ;
Hor c'hlevit-ni, bugale da Eva.
3. D'eoc'h-hu bepred e tenn hor c'halonou,
D'eoc'h e kasomp hor gouelvan, hon daelou ;
Hon holl fizians a zo 'n ho madelez,
En draonienn-man leun a dristidigez.
- 4 Rak-se pa 'z oc'h hon difennourez ker,
En hor c'henver bepred dous ha tener,
En han' Doue, grit gant ho taoulagad
Eur zell ouzomp, tud paour hag emzivad.
5. Pa zeuy an deiz da guitaat ar bed-man
Hon harlu trist deut ar termen d'ezan,
Grit ma welimp ar frouez ho peus douget,
Jezuz ho Mab, hor Zalver benniget.
6. O Gwerc'hez sakr, o Mamm garantezus,
Rouanez vat, Itron drugarezus,
Ni hoc'h asped, selaouit hor pedenn,
Ha ni d'hon tro ho meulo da viken.
7. Plijet ganeoc'h, Mamm zantel da Zoue,
Pedi dalc'hmat evit ho pugale,
'Vit ma c'hellimp kaout perz en holl grasou
Gounezet d'eomp gant Jezuz, hon Aotrou.

NI HO SALUD STEREDENN VOR

1. Ni ho Salud steredenn'vor,
Mamm da Zoue leun a enor, (enor)
Gwerc'hez bepred, dor an nenvou,
Selaouit mat hor pedennou.

Diskan :

Ave Maris Stella Dei Mater alma

2. Resevit ar zalud santel,
Salud an Arc'hél Gabriel :
E-lec'h an droug grêt gant Eva,
Digasit peoc'h d'comp er bed-ma.
3. Torrit chadenn ar bec'herien,
D'ar re 'zo dall roit sklerijenn,
Pellait diouzomp an holl zrougou,
Goulennit d'comp an holl vadou.
4. Diskouezit d'comp oc'h eur vamm vat,
En hor c'henver, tud emzivad :
Grit m'hor selaouo an Hini
Ho peus ganet evidomp-ni.
5. Gwerc'hez dispar e pep doare,
Dous a galon, glan a ene,
Grit d'comp trei kein da bep pec'hed
Ha beza dous ha glan bepred.
6. Grit ma vo santel hor buhez,
Ma heuilhimp hent ar wir furnez,
Ha ma vimp o welet Jezuz
En nenv ganeoc'h eun deiz eürus.
7. Gloar ato d'an Tad eternal,
D'ar Mab ha d'ar Spered Santel :
Rak da dri Ferson an Dreindêd
Ar memes enor a zo dleet.

PEGEN KAER

Diskan :

Pegen kaer ez eo Mamm Jezuz,
Pegen dous ha trugarezus,
Pegen mat ha madelezuz.

1. Lavar d'in me den an Arvor,
Ha ken kaer eo da vag war vor,
Gand e goueliou gwenn kan digor.
2. Lavar d'in me, den an Argoad,
Ha ken kaer deliou glas ar c'hoad,
Pa zeu eur bann-heol d'o skleraat.
3. Lavar d'in-me, den an Are,
Ha ken kaer eo lein ar mene,
Gwenn-kann gant an erc'h d'ar beure ?
4. Nag en Arvor, nag en Argoad,
Er menez, en oabl nag er prad,
Netra ken kaer, netra ken mat !

KALON DINAMM VARI

1. Kalon dinamm Vari Leun a garantez,
Ni 'zeu d'ho saludi Gant an holl Elez.

Diskan :

Ave ave ave Maria,
Ave ave ave Maria,

2. Feunteun an holl c'hasou,
Sellit gant true
Ouz hon holl ezommu
A gorf, a ene.
3. Betek e Breiz-Izel,
Gwechall bro ar Zent,
Ouz an Iliz santel
Kalz a zo dizen.

4. Roit d'an den dallet
Gras ar sklerijenn,
D'ar pec'her kaledet
Gras ar binijenn,
5. En hon tiegeziou
Lakit karantez,
Hag en hor c'halonou
Peoc'h ha levenez.
6. C'houi 'zo Mamm da Jezuz,
Mamm d'ar gristenien,
C'houi 'zo trugarezus
'Vit ar bec'herien,
7. Stouet omp d'an douar
Dirak ho Kalon,
Gant keuz ha gant glac'har
O c'houlenn pardon.
8. Ennoc'h hon holl fizians
Epad hor buhe :
Ennoc'h hon esperans
Er maro ive.

MARI HOR MAMM GARANTEZUZ

1. Mari hor mamm garantezus,
Taolit eur zell madelezus,
Warnomp el lec'h man dastumet,
Evit ho meuli Mamm garet.
2. Ezomm en deus, en e neizig,
Eus askell e vamm an evnig :
Dindan ho tiouaskell ive,
Mari, lakit ho pugale.
3. D'an hanv, pa vez an heol re domm,
Ar park a c'hlaou en deus ezomm ;
Digasit warnomp gliz Doue :
Mari, sec'h-korn eo hon ene.

4. Ezomm o deus an deñved keiz
Da veza miret diouz ar bleiz ;
Ni hon eus ezomm, Gwerc'hez c'hlan,
Da veza miret diouz Satan.
5. Eur c'hrouadurig, pa'z eo klanv,
Pa 'man an derzienn vras gantan,
Digant e vamm a c'houlenn dour :
Klanv omp, Gwerc'hez, deut d'horzikour.
6. Pa vez kounnaret ar mor bras,
Bagig ar pesketour, sionaz !
Gant an tarziou a vo lonket,
Ma n'eo gant Doue diwallet.
7. 'Ar bed a zo eur mor spontus,
Leun a gerreg hag houlenurus ;
Hag hor bag-ni 'zo ken dister :
Truez ouzomp, o Mamm dener !

ME A LAKA VA FIZIANZ

1. Me a laka va fizians,
Gwerc'hez, en ho sikour,
Deut 'ta m'ho ped, gant doujans,
D'argas hon enebour,
Pa skoy va eur diweza,
Me bed ho madelez,
D'ober d'in mont d'azeza,
E kichen an Elez.

2. O mamm leun a drugarez,
O gwerc'hez benniget,
Hag e peb lec'h ha bemdez,
Hor zikourit bepred,
Kinnigit d'ho Mab Jezuz,
Pedenn ho pugale,
C'houi a zo ken galloudus,
War galon hon Doue.
3. Gwerc'hez glorius Vari,
Repu ar bec'herien,
Me ho ped d'am frealzi
Em spont hag em anken ;
C'houi am difenno 'r gwella :
Ho Mab 'zo va Roue,
Ar pezh a ra d'in krena,
Va Barner eo ive.
4. Pa varvin, va Mamm dener,
Pa guitain an douar,
Mirit ouz brec'h va barner
D'am skei'en e gounnar,
O Mamm leun a vadelez,
Difenn t ho pugel,
Ha betek fin va buhez
D'eoc'h me 'vezo fidel.

D'HOR MAMM ZANTEZ ANNA

Diskan. :

D'hor mamm zantez Anna,
D'an ltron Varia,
D'hor Zalver beniget,
Ni 'vo fidel bepred.

1. Hor c'halon baour mantret,
Gant glac'har hag enkreuz,
Ni a zo daouinet,
Dirazoc'h c'houi, Gwerc'hez.
2. Kurun hag avel föll,
Warnomp 'zo dirollet,
Hor bro 'zo 'vont da goll :
Truez ! Mamm benniget.
3. Lezenn Doue gwechall
A rene kaer er vro ;
Gwall youlou an dud fall
He stlej eün d'ar maro.
4. Vel eur vandenn chas mut,
Gant kounnar, noz ha deiz,
Emaint e-touez an dud
O klask mouga ar feiz.
5. Ni z'o gwir gristenien,
Krouadurien Doue,
Savet en e lezenn,
En e zoujans ive.
6. Ni 'zo gwir gristenien,
Prenet gant gwad Jezuz,
Maget dre c'hourc'hennenn
Gant e gorf presius.
7. Kristenien, hor baniel
A zo kroaz hor Zalver :
Ni her zav sounn'n uhel
Bemdez, e pep amzer.
8. Mirit hor bugale :
Grit ma vezint desket
Da garout o Doue,
Da vevañ fur bepred.

13. Gwerc'hez, hor Mamm zantel,
Roit sikour hep dale ;
E plegou ho mantell,
Kuzit ho pugale.
14. C'houi a zo galloudus
War galon hor Zalver ;
Bezit madelezus :
C'honi 'zo eur Vamm dener.
15. E pevar c'horn ar vro,
Neuze ni holl, Gwerc'hez,
Betek eur hor maro,
Ni a gano bemdez :

PATRONEZ DOUS AR FOLGOAD

Diskan :

- Patronez dous ar Folgoad,
Hor Mamm hag hon Itron.
An dour en hon daoulagad,
Ni ho ped a galon :
Harpit an Iliz sant santel,
Avel diroll a ra...
Tenn hag hir eo ar diroll brezel !
Ar peo'ch, o Maria !
1. Eus an Arvor, ar gourre,
Ni 'deu d'ho saludi ;
Holl ez omp ho pugale,
Holl ho karomp, Mari.
Tud ar gourre, Arvoriz,
Diredet omp hirio.
Da bedi 'vit an Iliz,
Da bedi 'vit hor bro.

2. Gwechall er vro-man 'veve
Eur paour be'r a spered :
SALAUN AR FOLL ne ouie
Netra koulz lavaret.

Daou c'her « Ave Maria ».
Setu e holl bedenn ;
N'ehane ket d'o c'hana
Diwar skourr e wezenn.

3. Pell amzer, kan a zavas
A-us d'ar wezenn deo ;
Eun deiz ar vouez a davas
Salaun ne oa mui beo :
E ene gant an Elez
'Oa aet d'ho lez, Itron,
Da gana ho madelez
Bepred e-tal ho tron.
4. Ha lili 'oa diwanet
Ez-trumm war bez ar paour,
Hoc'h hano-c'houi garanet.
En deliou gwénn, en aour.
Al lili a ziwane
Er genou yen ha mut :
Ho floc'hig choaz a gane
H'och hano glan d'an dud.
5. 'Vel eur mor en em ledas
Ar brud dre Vreiz a-bez,
Ha Breiziz a ziredas
Da bedi war ar bez
Hag e-lec'h ar bod lili,
Evit ar grasou bet
O deus savet da Vari
Eun iliz kaer meurbet.

6. Mari, Mamm ar gristenien,
Ma karit 'an Iliz,
Hepdale d'he difenn
Diouz enebourien kriz.
Hirra ma c'heller gwelet,
Er mor 'zeus tarziou gwenn,
Bagig Sant Per 'zo strinket.
Eus eur garreg d'eben.
7. Diwallit na lavarfe
An dud fall 'zo er bed :
« Gwechall e oa Mamm Doue
Dous hag aes da garet ;
He diskouarn a oa tano
Klevet a rae raktal ;
Hirio ez eo pounner-gieo,
Outi eo ret krial. »
8. Nann, nann... A ! tavit pelloc'h.
Rak Mari, tud difeiz,
Morse ne deo bet tommoc'h
He c'halon en he c'hreiz :
Gwelet eo bet o lenva
War gern ar menezioù (1) :
Bemdez emai ho paea
Hon dle dre he daelou.
9. Dirak ho skeudenn, Mari,
Ni 'ra eur goulenn all :
Beilhit mat war hor bro-ni,
Breiz-Izel ha Bro-C'hall.
Diwallit an eneoù
Diouz mevelien Satan,
Selaouit hor pedennoù
Hag hon tennit a boan.
10. Bras eo bet hor pec'hejou,
Dister hor pinijenn ;
Rak-se e dorn an Aotrou
E chom ar wialenn

- Gwall zouget omp d'ar pec'hed,
Hor mirit, Gwerc'hez vat,
Diouz an droug en deus trec'het
Jezuz o skuilh e wad.
11. Merouréz oc'h gant Jezuz,
Ha d'eoc'h e ro pep gras ;
A ! bezit trugarezus,
Hon ezommou, 'zo bras.
E-kreiz an denvalijenn,
O gwerelaouenn vrao,
Ra baro ho skierijenn.
A-us d'hor penn atao.
 12. Pell 'zo c'houi 'zo bet choazet
Evit hor Rouanez ;
E nep bro n'ho peus kavet
Teneroc'h karantez.
Tud fidel a Vandennou
A deu, d'ho kaout bep bloaz,
Ha war hent ho chapelioù
N'eus ket eur c'heotenn c'hlas.
 13. Klevet a ran ho pedenn,
Bugale Breiz-Izel ;
Ya, rust eo ar wenodenn,
Ha tenn eo ar brezel.
Met na gollit ket fizians :
Dorn Doue ar c'hrenva,
Ha lagad e Brovidans
'Zo warnoc'h o para.
 14. Ma klevit mat hor pedenn,
Mirit na d-aimp da goll,
Ma c'hellimp kana laouen
Evel Salaün ar Foll :
« O Mari ! o Maria ! »
C'houi 'vezo hon Itron ;
Beteck an eur diweza,
Renit en hor c'halon,

SAINTE ANNE, O BONNE MÈRE

Refrain

Sainte Anne, o bonne Mère,
Toi que nous implorons
Entends notre prière
Et bénis tes Bretons.

1. Pour montrer à la terre
Que nous croyons Au Ciel,
Notre Bretagne est fière
D'entourer ton autel.
2. Quand l'erreur se déchaîne
Pour vaincre notre foi,
Puissante souveraine,
Nous espérons en toi.
3. Protège le Saint-Père,
Dont le cœur humble et grand
Souffre sur le Calvaire,
Comme Jésus mourant.
4. Fais que la sainte Eglise
Répande en liberté,
Sur la terre soumise,
L'auguste vérité.
5. Rends à la noble France
Sa gloire d'autrefois :
Fais grandir sa puissance
A l'ombre de la Croix.
6. Que le monde redise
En tout temps, en tous lieux :
La fiile de l'Eglise
Est le soldat de Dieu.

7. Soutiens dans la tourmente
Les pauvres matelots ;
Sauve la barque errante
De la fureur des flots.
8. Conserve à la Bretagne
Ses valeureux soldats ;
Ton cœur les accompagne
Au milieu des combats.
9. Que le pauvre village
Et les riches cités
Sous ton doux patronage
Soient toujours abrités.
10. Ta fille immaculée,
Reine au divin séjour,
A notre âme troublée
Sourit avec amour.
11. Dis-lui notre misère
Afin que sa bonté
Fléchisse la colère
De Jésus irrité.
12. O Sainte Anne, ô Marie
Nos vœux montent vers vous
Sauvez notre patrie
Priez, priez pour nous

NANN, N'EUS KET E BREIZ

Diskan :

Nann, n'eus ket e Breiz, nann n'eus ket unan,
Nann, n'eus ket eur zant evel sant Erwan,
Nann, n'eus ket eur zant evel sant Erwan.

1. Néus ket en Argoad, na mui en Arvor,
Koulz ha sant Erwan 'vit an dud a vor,
Koulz ha sant Erwan 'vit an dud a vor.
2. Nann, n'eus ket er vro, vel ma lavarer,
Hag a ve kèn mat 'vit al labourer.
3. N'eus ket kaeroc'h skouer d'an dud a lezenn,
Eget sant Erwan, skouer ar veleien.
4. Ha d'ar beorien gêz ha d'an dud à boan,
Nann, n'eus ket gwelloc'h eget sant sant Erwan.
5. Neus ket eur japel a beder enni,
Gant mui a galon 'get er Vinihi (2).
6. Ma fell d'eoc'h an tu da gaout ho mennad,
Pedit san Erwan, ha pedit ervat.
7. Pegen mat pedi, pa vez poan-spered,
E-lec'h ma pedas ar Zant benniget !
8. Pegen brao pleustri an douar santel
Bet pleustret gwechall gant Sant Breiz-Izel !
9. Epad e vuhez eur skouer 'vit an holl,
Bévomp evêldan, ne d-aïmp ket da goll.
10. Plijout d'hor Zant bras nèb a fell dezan,
A die war e vèz-mont da zaoulina.
11. Déomp 'ta, kristènienn, betek Landrèger,
Ha ne gollimp ket, sur mat, hon amzer.
12. Evel hon Tadou, int tud a gredenn,
Lavaromp d'ar Zant, n'eur gaer a bedenn :
13. Aotrou Sant Erwan, Patron Breiz-Izel,
Beza treitour d'eoc'h, nann, kèntoc'h mervel !